

BREZEL BRAS 1914-1918

ABEGOU AR BREZEL

Impalaerouriezh

Kevezerezhioù etre ar Stadoù Europa: en trevadennoù, àr an dachenn vilourel, àr an dachenn ekonomikel...

Broadelouriezhioù

Minorelezhioù en Impalaeriezh Aostria-Hungaria a c'houlenn muioc'h a emrenerezh (Slaviz ar Su)

Elzas-Loren

Kollet he deus Elzas-Loren abaoe 1871: spered koll-digoll

SISTEM AN ALIAÑSOU

Emglev tridoupl: Frañs, R-U, Rusia
Aliañs tridoupl: Impalaeriezh Alaman, Impalaeriezh Aostria-Hungaria, Italia

LAZHADEG E SARAJEVO

D'an 28 a viz Even 1914 e voe lazhet Frañsez-Ferdinand a Habsburg, priñs pennhêr Impalaeriezh Aostria-Hungaria da geñver ur veaj ofisiel e Sarajevo, kêrbenn Bosnia-Herzegovina .Lazhet e voe get ur studier Princip , ezel ur gevredigezh broadelourel kuzh serbat, Dorn Du , pal dezhi e oa dieubiñ Slaviz ar Su diouzh gwask Aostria ha bodiñ anezhe tr-dro da Serbia.

28 a viz Gouere 1914 e tisklêrias Aostria-Hungaria ar brezel da Serbia.
D'an 30 e vo ar c'halvadeg hollek e Rusia.

PRANTADOU PENNAÑ AR BREZEL

Brezel prim trec'het(Eost-Kerzu 1914)

-Plañ Schlieffen: tremen dre Belgia evit flastriñ Frañs;-Plañ XVII: gortoz e Loren an argad alaman> kreñvaat ar bagadoù du-hont.

Argad:

-Eost: Alamaned e Belgia ha Frañs(50 km a Bariz)

-Enep -argad gall: 6-11 a viz Gwengolo 1914 get general Joffre : taksioù Marne
Talbenn etre Mor an Hanternoz betek Suis (800 km)

- Reter Europa: trec'het ar Rusianed e Tannenberg (27-30 Eost 1914)

Brezel difiñv: brezel en trañcheoù: 1915-1917

-Er fozioù-difenn: etre an div arme enebourez: no man's land

-Feulster an emgannoù, eugusted evit ar "Poilus": razhed, laou, pri...

-Teknikoù, armoù nevez: gazoù Mougïñ Yperite, tankoù, fuzuilhoù-kontilli, greunadoù, mitrailhennoù.....

1917: blezad ar strafuilh

Mutinerezhioù en armeoù(rol Petain)
harzoù-brezel: skuizhder.....

C'hwevrer 1917: dispac'h Rusia (Nikolas II a ro e zilez> arsav-brezel Brest-Litovske miz Meurzh 1918

Ebrel 1917: donedigezh SUA

1918: an disoc'h

-Meurzh 1918: argad alaman e Kornôg, djablet e Reter betek Flandrez ha Champagne.

-Foch get harp an Amerikaned (2 vilion) hag armoù nevez a voe trec'h en eil emgann Marne. Arsav-brezel sinet e Rethondes d'an 11 a viz Du 1918.

UR BREZEL HOLLEK

Ekonomiezh àr-zu ar brezel

-Brezel industriel: produiñ pourveziou-brezel(obuziòù, tankoù...)
- Dispignoù ar Stadoù divent: tailhoù é kraapat, amprestoù get ar poblañsoù, get SUA > krouiñ moneiz> c’hwez moneiz(prizioù é kraapat)

Striv-brezel

Diouer a zorn: maouezed é kemer plas ar baotred en uzinoù, er parkeier, er minoù
Bugale, tud kozh ivez

Poanioù ar poblañsoù

- Diouer a vadoù-beveziñ èl ar glaou, tikedoù-boued, rekizadurioù,

Mobiliziñ ar speredoù

-Poblañs evezhiet
-Kontrollerezh, propaganda,
Choukiñ pennadoù: troienn ijinet get soudarded ar Brezel pevarzek evit ober goap doc’h c’helachouù droch skignet get tud an adreñv

BUHEZ AR SOUDARDED ER FOZIOU-DIFENN

Feulster an emgannoù

-Trañcheoù lec’h e vez douaret ar soudarded tal doc’h tal doc’h an enebour hag e-kreiz an no man’s land.
-Argadoù taer get obuziòù
Ur bochad tud lazhet, gloazet: Verdun(700.000 marv)
-Kazetennoù er fozioù-difenn : La Mitraille
-Rol a bouez maeronezed ar brezel: eskemm lizherioù get ar soudarded evit roiñ kalon hag evit karantez-vro.

Stuzoù-beviñ heugus ha truezus

-Yenijenn, fank, razhed, laou,
yec’honiezh mezhus, lec’h prevez ebet, glebder, korfoù-marv a chom
« L’enfer c’est la boue »

-ar “Poilu”: lesanv ar soudard a zeue da vout barvek peogwir ne oa ket moaien troc’hiñ e varv dezhañ.

Skuizhder ar soudarded

1917: Mutinerezhioù :nac’hiñ sentiñ doc’h urzhioù ur jeneral pe penn ar bagad.:250 en arme gall get 40.000 mutinour
Disoc’h:554 kondaonet , 49 marv
E-touesk 23 a Vreizhiz a oa barnet d’ar marv ha fuzuilhet.
Petain a roas dezhe muioc’h a aotreoù, a voued....

EFEDOU AR BREZEL PEVARZEK

EUROPA AET GWAN

EFEDOU DEMOGRAFEL HAG EKONOMIKEL

- >9-10 milion a dud marv
- 17 milion a dud c'hloazet "genoù torret" > "gueules cassées"
- 4 milion a intañvezed, 8 milion a vinored
- >+ ur milion get an dienez hag ar grip spagniolad
- "rummadoù goullo": diouer a vugale ganet : ur milion de Frañs ha 3,5 milion en Alamagn
- Poblañs é kozhaat
- Kentañ **gouennlazh** (distrujiñ ur bobl) get an Durked àr an Armenianed(1,4 miliona dud marv) e 1915
- Distrujoù e Reter ha Norzh Frañs: uzinoù bombezennet, kêriadenoù dismantret . Europa a gollas 40% ag he c'halloudegezh industriel ha 30% evit al labour-douar
- C'hwez ar moneiz (x3,5 evit ar prizioù etre 1914 ha 1918)
- SUA= Stad nevez é vrasaat(trec'hourien bennañ). An holl vroioù kenvrezelourien dezhe a zlee argant dezhe.

UR GEVREDIGEZH DISTABILET

- Poblañs stroñset: "La Der des Ders" get feulster an emgannoù
- Pouez ar merc'hed: gwir-votiñ er R-U, Alamagn
- Brezelourien kozh strollet er c'hevredigezhioù (dever a vemor)
- Mouezhioù en trevadennoù é sevel evit bout kemeret èl keodediz

EUROPA ADSAVET GET AR RE DREC'H

- Kendiviz etrevroadel e Pariz (Genver 1919-Eost 1920) get Wilson (SUA), Clemenceau(Frañs), Lloyd George(RU), Orlando(Italia): sevel en-dro an harzoù evit Europa.
- Diazezet eo an holl emglevioù diàr roll-mennadoù Wilson(14): doujiñ doc'h ar broadelouriezhioù.
- Krouidigezh Kevredigezh ar Broadoù (S.D.N) : gwarantiñ ar peoc'h.

FEUR-EMGLEV VERSAILHEZ 28 a viz Even 1919:

- Kastizoù drastus:
 - Kiriek ha kablus eo Alamagn(rann 231)
 - Harzoù: koll a reas Elzas-Loren, trapas Dantzig, lodenn reterel da lâret eo 15% ag an tiriad
 - Milourel: arme get nemet 100 000 soudard, rannvro ar Rein disoudarded ha dalc'het e-pad 15 vlez.
 - Ekonomikel ha sokial: Saar da Frañs , paeañ **digolloù pounner** –tre d'an drec'hourien (132 miliard marks = 3,5 blezad gopr da vout paet e 30 vlez)

ARVARUS E CHOME AR PEOC'H

- feu-emglev evit an Alamaned: "Diktat" a raent anezhañ.
- Minorelezhioù broadel a chome edan galloud ar Stadoù (Alamaned ar Sudetoù e Tchekoslovakia)
- Italia: n'he deus ket bet Dalmatia
- SUA a nac'has siniñ emglev Versailles ha kemer perzh er KAB